

KELEIER PLOGO

Diouzh ar mintin, pa zao ar glizh

E-sao an ed hag ar gwinizh

E-sao an ed diouzh an douar

Na pa vez c'hoazh an heol klouar

Ouspen an heol a zao abred

Ouspenn ar gwinizh hag an ed

keleier fall dre ar c'hontre

A zao abretoc'h ewit an de

Ha tud Plogo, a lavare

En traon an tour an eil d'egile

Livirit din e gwirionez

Petra zo nevez er barrez

Petra zo nevez barz ar vro

Hag er parrezioù tro-war-dro

Na pa welan war ar blassenn

Yann-Vari Kerloc'h tenval e benn

(Ar) **Pezh a glevan** a zo spontus

Ouspenn m'eo trist ha glac'harus

Gwerzhet eo Plogo da Bariz

Ur greizenn vras plas ar gwinizh

E plas an ed ur mekanik foll
A vije gouest da lac'han an holl
Petramant c'hoaz a-nebeutou
D'hor c'has er-maes eus hon douarou

Ewid hor c'has 'maes ne rayo ket
Warlec'h an had 'teuio an ed
Hag an ed ranker da zournan
Araok ma chomje da vreinan

Hag aman e parrez Plogo
An aotrou bras hag e gof teo
Pa teuio gand e roched gwenn
A zesko bale er vouilhen

Bez e tesko gand e ardou
Piw eo ar mestr war an douarou
Na pa ranko mond war e giz
Don dar vouilhen beteg Pariz

Ha breman p'eo echu va son
M'ho peus ket sonj vad deus an ton
Kanit anezi war un ton all
Ha kanit, **kanit e giz Gwechall.**